

Jezuz gant e gomzou, tri bloaz 'n deus o maget,  
Bemdez evel chas klanv, int o deus e daget  
Hag ouz ar groaz erfin staget.

Aze, a-wel d'an holl, e tremen war c'hrec'h  
N'eo ket evit finval nag e droad, nag e vrec'h  
En taol-man, d'ezan ez int trec'h.

Tud vat da doull ar roc'h a zoug korf Mestr ar bed,  
Hag, o c'hleze ganto, soudarded deut d'ar red

El liorz sioul a ra ar ged.

Madalen baour a lenv d'he hunvre diskaret,  
Klask a ra e pep lec'h dremm he Mignon karet

Hag he mouez a sav glac'haret:

"Daoust hag aet eo da goll e labour talvoudus ?

Ha klevout a ra c'hoaz va c'hlemmou hirvoudus ?

Seizet eo e zorn galloudus ?"

Feiz laosk e ebestel a daol nebeut a flamm,  
O fenn war o diouskoaz a bleg dindan ar samm,  
Unan a jom e peoc'h: e Vamm.

Hogen, d'an trede deiz, gant an heol a save,  
Lacuen e ti Mari Jezuz en em gave,  
Gant eur mousc'hoarz hag eun "Ave".

Ha Madalen e wel, ha meur a vaouez all,  
Ha da c'houde, Per, Yann, Tomaz, ar c'hreder fall,  
Leun a vuhez evel gwechall.

Krenneten deus e skilf d'hon enebour garo,  
En oabl, skubet outan spez euzus ar maro,  
Heol an esperans a baro.

Torr da yeo, mab Adam, drailh da nask, merc'h Eva,  
Goulennit digantant dour gwalc'hus da eva  
Hag an doare mat da veva.

